

XV

Ni c'houlen pardon evit hor bro garet,
 Evit an holl dud zo dallet ho spered,
 Ni c'houlen truez evit hor re vihan,
 Vidomp hon unan.

GWENNAEL.

*Santez Mari mam Doue
 Biouallit ho pugale.*

AOTRE DA VOULLA :

Kemper, 2 Miz Maë 1939.

P. JONCOUR.

Vikel Vraz.


Pardon bras Lourd d'an trede sul a viz Gouere.

D'ar zadorn arog : Offerennou da 7 ha da 8 heur.
 Da 8 h. 1/2 deuz an noz : procession deus an iliz
 parrez da Lourd ; gousperou ; sennon ; procession
 ar goulou. Coessionnou epad an noz.

D'ar zul : Offerennou, da 2 h., 6, 7, 8 h. Offeren
 bred da 10 h. 1/2. Gousperou da 3 h. ; procession ;
 benediction ar Sakramant.

Lun : Offerennou, 7 ha 8 heur.

Kemper, Moullerez ru an Dudchentil, 7.



Cantik

INTRON VARIA LEUHAN

DISCAN :

O Guerc'hez dinam, deut er bed heb pec'hed,
 Da chapel Leuhan ni zired d'ho cuelet ;
 Euz barr an envou selaouit heb dale
 Mouez ho pugale.

I

Bep ploaz e veler euz douar Breiz-Izel
 An dud niveruz, laouen o tilezël
 Ho zi, ho labour, da vonet d'ho pedi
 Da Lourd, o Mari.

II

Ni garfe nijal tre d'ar roc'h burzuduz
 A zo bet breset gant ho treid, mam Jesus,
 D'ar feunteun dispar, louzaouen p'eb c'ienved,
 Ar c'horf, ar spered.

III

Ma n'hellomp siouaz ! holl cuitât hor mêziou
 Da gerzet ken pell, beteg ar menezioù,
 Aman, calonec, d'eoc'h ni gas hor peden
 Dirag ho skeuden.

IV

Eur person caret he zavaz eun dervez
 Dre anaoudegez evidoc'h, o Guerc'hez ;
 Rag dre ho scoazel e cavaz ar guelet
 En doa dem-gollet.

V

Gant ar bloaveziou, bennoz d'an dud fidel,
 Eur person névez a zavaz eur chapel
 Eur men zo enn-hi, euz a Lourd digaset
 Er voger clozet.

VI

Eun tam euz ar voal zo ganeoc'h bet douget.
 Euz Rom da Leuhan eun deiz zo digouezet ;
 Pe seurt relegou a ve ken talvouduz
 Ha re mam Jesus ?

VII

Piou c'helfe laret ar grasou ken nerzuz
 A scuillit leun zorn, o mam madeleuz,
 Var ar gristenien a deu a greiz calon
 Aman d'ho pardon.

VIII

Mam a drugarez, c'houi zo ken gallouduz !
 Mirit na gouezo varnomp counnar Jesus.
 Guerc'hez ar menez, scoazellit ac'hanomp,
 Pedit evidomp.

IX

Guehall ar Vreiziz, leun a zoujans Doue
 Hen anaveze vit ho mestr, ho roue.
 O, grit ma virimp, daoust d'an enebourien
 Bepred he lezen.

X

Mez hirio siouaz ! calz a dud, touellet
 Gant an droug-spered, ho deuz hanter-gollet
 Feiz coz ho zadou ken stard en ho c'hreden
 Lezet ar beden.

XI

Na ped, d'ar guener, coulz ha d'ar vijilou
 A dor al lezen o fibri ho frejou ;
 Enn-ho ar pec'hed, gant ar boued difennet
 A zo diskennet.

XII

Lod zo, ne glevont, d'ar zul na d'ar gueliou,
 Mouez drant ar c'hleyer ho galv d'an ilizou ;
 Lod n'ouzont paduez, zoken var ar mêziou
 Da feiz an Aotrou.

XIII

Darn zo dizeblant euz ene ar bugel
 Crouadur Doue, templ ar Spered Santel,
 Grêt evit beva en envou peurbaduz
 Gant he vreur Jesus.

XIV

Euz ar guall-scuerien hag ar scol dibater
 Mirit, mam zantel, hor bugale dener ;
 Criz eo ar brezel zo d'ho feiz discleriet
 Gant tud milliget.